

Kloarec K/Tanguy.

Mar plich ganech sellaouet ag e kleffet cana
 eur zon a zo komposet a neve ewit ar blos
 en Deus gred eur c'hloarec yaua(nq) evit e blijadur
 a balamour de vestres a garie dreis(t) musur.

Pa oua ar c'hl(o)arec yauanq e len e liserou
 e hantren eur messager en e zorn eur c'helou
 Debonjour dide Kloarek meurbet out disoursi
 a demeset ta vestres a poa en K/tanguy.

Ar c'hloarec yauanq pa klevas a ia incontinent
 Da kaout e vevel bras gant eur comandament
 Dib prest din va incane kerc'h dean da zebri
 evit ma in da goania fenos da guertanguy

En K/tanguy pa eo arruet oaint deus tol o koania
 ag in ag o salludi a(r) re goz da guenta
 Debonjour dide Kloarec petra o heus a neve
 mar koeller en K/tanguy dar point ma deus an de

Allies avoalc'h on kustum da zarempret o di
 Deus an nos a deus mintin pa ve ordrenet (1) din

Ar c'hloarec yaouanq pa klevas a ia incontinent
 Da kaout ar beneres gant eur galon charmant
 Debonchour dec'h va mestres guir objet va speret
 eur vativant e voam om daou ag o c'heus difreset.

Ne teus ked a chong Kloarek pa voas en skol en Kemper
 evit goud da santimant me kasse did liser
 ag e roes anese da vam a da tad
 Da vreudeur a da choareset a re achanon goab.

En neel zur va mestres no tislavarin ked
 ne meus ked o recevet me karje en (2) bije gred
 ne meus ked o recevet me a karje em bije
 va c'herent a va ligne a voad an to (3) a ze

Arca eta va mestres lavaret din en ber komso
 o ligne a ve komtant e temesen on daou

O ia emei Kloarec perag na vezint ked
va unan me a meus ie pretention var ze.

Va unan me a meus ie eu(n) tam pretantion
An eb a us a kle choas evel just a reson.

Nen doc'h ked deus va chalite na pa oc'h peisantes
mes mar goulit servicha deud dam zi da vates
na mar goulit servicha deud da vates dam zi
Rag evit o c'heureuji biken james na rin.

En neel emi Kloarec te a c'heus va zromplet
te c'heus goet va santimant en al nen grach ked
..... ganenn me franchamant
Breman me avertisso an oll merc'hed youanq.

(1) *Ce mot est douteux. ordrenet*

(2) *Ms. a : en ; lire : em.*

(3) *Je ne comprends pas ces mots : an to*